

- 99 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

121. BONOMIK

(follennoù 94-95)

Debonjour e ta, Jannedik, bonjour a lavaran
 Pelec'h e man ar bonhomik ne man ked e toman
Breman

—
 Ed e duze da Parck da vessaat an ed
 Mar kerit parlant koantik ne viot ked refuset,
 me a gred

—
 - Debonjour e ta, Bonomik, bonjour a lavaran
 O merc'h evid dimezi diganeoc'h a c'houlennan
Breman.

—
 - Sallokras, galand iacouank, ne demezin ked c'hoas
 Chom a rañ daou pe tri bla da ren an ebad c'hoas
 evid c'hoas.

—
 - Keus o pezo, bonhomik, d'am beza refuset
 a pa kiniger kant goech me ne komerit^o ket °komerin
 ne rin ket.

—
 A ben eun neubeut goude e chom Jannedik klan
 A donnet ar bonomik na de neun chagrinan
hanhan.

—
 eun dervez deus ar vintin e komeras e vas
 Treuz a ti ar galant iacouank da klasq de verc'h eur goas
 evid c'hoas

—
 - Debonjour e ta, den iacouank, debonjour e lavaran
 abaoe ma oc'h bed duman e chomet ar verc'h klan
 a han.

—
 - Keuz o heus breman, bonomik, d'am beza refuset
 a pe chiniker kant goëch me ne c'homerin ket,
 ne rin ket

~~~~~

Moris Follezour, 29 févr. 1851

~~~~~

(Kv. Annaic ar Fichant, Son. I, 174)